

AN DURZUNELL

Ar zôn-mun a zo bet kanet ha diskanet gwechall e kement pardon, foar
ha marc'had a oa e Breiz-Izel: an ton a zo aes da zeski ha kaer kenan.

Kalz am - zer am eus kol - let, Ti ra
di lan ti ra, da la la la la, Kalz
am - zer am eus kol - let o fur - chal ar c'hoajou.
O fur - chal ar c'hoajou.

Kalz amzer am eus kollet
O furchal ar c'hoajou
*Vit surpren an durzunell
Kousket war ar brankou.
Skoaziet em eus va fusul,
Met tennet em eus fall,
Ech'het eo an durzunell,
Ha bilet ar c'hoad all.

Biouz an noz g'ar mintin
Me gley al laboused
O kana, o fedoni,
Da veg ar gwez rignet,
Ha n'eus nikun anezo
A bikfe va c'halon
Evel meuez an durzunell
O ouela d'he mignon.

Hirvoudi ra noz ha dez
Gand ar boan, an anken,
*Vel eur baot-kaez intanvez
Koll'et ganti he den.
Hekleo he meuez klemmus
A red dre ar c'hoajou,
A zo meurbet poanuis
D'an holl labousedou.

— Petra, turzunell yaouank,
A dourmant da galon?
— Kollet em eus, emezi,
Va fidela mignon!
Ma na deu ar chaseour
D'ober d'in-me mervel
Me varvo gand ar c'hlae'har
Da va mignon fidel.

N'eus na louzou, na souten,
Na frealzigedez
Gouest da barea souden
Gouli va c'harantez.
*Trec'het oun gand ar c'hlae'har ;
Mont a ran da vervel,
Met ne varvin ket kountant
Ma ne varvan fidel. »

Gwelet em eus o vervel
An durzunell yaouank
Dizec'het piz he c'halon
Gand ar boan, an tourmant.
En he huanad diweza
He deuz c'hoaz lavaret :
« Kenavo, mignon fidel ! »
Raktal eo tremenet !

Melezour sklaer ha gwirion
Eus ar wir garantez,
Ha ne gaver e kalon
Ar yaouankiz direiz.
— Nann, nann: ne varvin laouen,
Ma ne varvan fidel.
Ha biken ne zizonjin
Maro an durzunell.

Dastumet gant PAOTR TREOURÉ.